

# KANTIK SANT KOULM

Patroun Plougoulm



DISKAN

O Sant Koulm benniget,  
 Hor Patroun ken karet,  
 Euz ho trouen en Envou,  
 Lakit n'hor c'halonou  
 Eur garantez dispar  
 'Vit Doue hag he c'hloar.

1

En Irland, d'ar c'huec'hvet kantvet,  
 Sant Koulm, hor Patroun zo ganet ;  
 He gerent, tud a renk huel,  
 A ioa ouzpenn kerent santel.

2

Eun eal d'he vam n'em ziskuezet,  
 A-berz Doue n'oa lavaret :  
 Ouzoc'hui c'hano eur bugel  
 'Vezo fur guizie, ha santel.

3

Ar vam neuze, gant kalz a boan  
 A zavaz he mabik bihan  
 En he c'haloun ar brassa c'hoant  
 Da velet he bugel eur zant.

4

Aoutrou Sant Koulm, dre ho peden,  
 Sikourit ar mamou kristen  
 Da zevel mad ho bugale  
 D'ho zevel en doujans Doue.

5

Goude beza bet kelennet  
Gant menec'h Santel ha brudet,  
Ezeaz d'ar gouen ive  
Leac'h ma oa Tad abat goude.

6

He galoun devet hep paouez  
Gant tan divin ar garantez,  
Koulm d'he dro zavaz manatiou  
'Vit brassa mad an eneou.

7

Skuer vad an holl er manati  
E tremen 'n amzer o pedi,  
O kastiza eürus, laouen  
He gorf dre bep seurt pinijen.

8

Eur sklerijen gaer, burzudus,  
Tro var dro d'ezhan o para,  
Roe d'ar zant, a-berz Jezuz  
Euz a baradoz eun tanva.

9

Sant Koulm, goulennit gant Doue  
D'eomp-ni sklerijen, nerz ive  
Da c'heuill bepred ha pen da ben  
An hent striz euz he c'hourc'hemen.

10

Ma vimp eur skuer a zantelez  
Ha d'hor c'herent ha d'ar barrez ;  
Ma c'hellimp dougen an nessa  
Da garet Doue dreist peb tra.

11

Sant Koulm, klevit hor pedennou,  
Digorit d'eomp d'or an envou :  
Eno ni gano da viken  
Meuleudi Doue 'n'ho kichen.

L. C.